

«N'EO KET MUI ME, AR C'HRIST EO A VEV ENNON». (Gal 2, 20)

LIZHER PASTOREL ESKOB KEMPER HA LEON, LAORAÑS DOGNIN MIZ HERE 2025

Lizher evit prientiñ gouestladur an eskopti da Galon Sakr Jezuz.

Gouestlañ hon eskopti da Galon Sakr Jezuz a dalvez ober e doare ma ne vo ket bevennet hor reteradurioù d'ar strivoù pastorel, forzh pegen reizh e vefent, ha ma vo degemeret ha kehelet leun karantez Jezuz ha reiñ evel-se frouezh a-builh.

E-pad gouel ar Pantekost 2025 hag hon emgav eskoptiek bras e kreizenn an diskouezadegoù er Penfell e Brest, em boa embannet en homelienn e renevezin kensakradur hon eskopti da Galon Sakr Jezuz d'ar Sul 14 a viz Kerzu 2025, e-kerz pardon Sant Kaourantin en iliz-veur Kemper. D'an deiz-se e klozin ivez Bloavezh ar Jubile evit hon eskopti. Kement-se a vo ur graet a-nevez e gwirionez, peogwir e oa bet kensakret hon eskopti endeo da Galon Sakr Jezuz d'ar 1añ a viz Even 1889, gant an eskob Jakez-Teodor Lamarche, eskob Kemper ha Leon d'ar mare-se, d'ur mare eus an istor ma oa al lezennoù enepkloer o vont gwashoc'h-gwashañ. Un doare e oa da lakaat ar gristenien da soñjal ne gavomp ket hor silvidigezh gant ur respont feuls, met e kalon garantezus ha gouzañvus Jezuz.

An devosion-mañ a c'hell seblantout diamzeret en amzer-vremañ, met n'eo ket. Lavarout a rafen zoken emañ o tont en-dro, dreist-holl gant embannadur Lizher-meur Dilexit nos ar pab Frañsez war garantez denel ha doueel Kalon Jezuz-Krist, a vez sellet outañ gant ar Pab Leon XIV evel testamant speredel e ziaraoger. Ar pab Frañsez a zisplege he deus «*ezhomm an Iliz eus an deoliezh-mañ evit chom hep lakaat e plas karantez ar C'hris, frammoù diamzeret, sorc'henoù a denn d'un amzer all, azeulerezh e zoare-soñjal an-unan, fanategezhioù a bep seurt hag a gemer plas karantez gradus Doue, a zieub, a ro buhez, a laouena ar galon, hag a vag ar c'humuniezhioù*»¹.

An eskob Moulins-Beaufort, evel Prezidant Bodadeg Eskibien Bro-C'hall, en deus adc'hraet kensakradur Bro-C'hall da Galon Sakr Jezuz ha da Galon Mari d'ar 27 a viz Mezheven 2025, e Paray-le-Monial, da-geñver 350vet deiz-ha-bloaz emziskouezioù Kalon Sakr Jezuz da santez Marc'harid Mari Alakok².

Fellout a ra din gant al lizher-mañ reiñ un nebeud displegadennoù diwar-benn ar c'hensakradur-se, displegañ an abegoù a ra din e c'houlenn evit hon eskopti, ha reiñ un nebeud titouroù pleustrek da sikour ar fideled hag ar parrezioù d'en em brientiñ.

Eus a belec'h e teu an devosion-se da Galon Sakr Jezuz ?

Evel m'en doa degaset en-dro da soñj ar Pab Sant Yann-Baol II : « *An elfennoù diazez eus an devosion-se a zo (...) ar memes re gant speredelezh an Iliz a-hed hec'h istor ; rak, adalek ar penn-kentañ, an Iliz he deus troet he sell war-zu Kalon ar C'hris staget ouzh ar Groaz*³ ».

1 Pab Frañsez, Dilexit nos, niv. 219.

2 Er XVIIvet kantved en em ziskouezas ar C'hris da santez Marc'harid Mari e Paray-le-Monial. Etre 1673 ha 1675 e fizias enni teir c'hemennadenn vras evit an Iliz hag ar bed. Reiñ a reas da anavezout anezho, sikouret gant sant Klaoda La Colombière. Ur gemennadenn eo evit ar bed a-vremañ, a glask ster hag esperañs, gwriennet koulz en arouez ar galon ha penn-da-benn er Skritur sakr.

3 Lizher d'an Aotrou Pêr-Hans KOLVENBACH, merour meur Kevredigezh Jezuz, Paray-le-Monial, d'ar 5 a viz Here 1986. Meneget e Dilexit niv., niv. 101.

Kalon-gig an den, dre ma'z eo un organ-ret evit chom bev, he deus ur vent arouezel kreñv-tre. Bepred ez eo bet implijet evit diskouez ar garantez, rak kalon an den o talmañ a ziskouez ar santimant en deus un den e-keñver an hini zo karet gantañ. Evel diskibien Emmaus o selaou Jezuz : « *Ha ne verve ket hor c'halon en hor c'hreiz pa gomze ouzhimp war an hent ?* (Lk 24, 32). N'eus ket anv amañ a santimantelezh, met eus un darempred a garantez, evel ma lavar Jezuz e-unan : "...deuit davedon, rak dous on, hag izel a galon, ha diskuizh a gavot evit hoc'h eneoù." (Mzh 11, 29)

Er bloaz 1673, santez Marc'harid Mari Alakok a glevas ar C'hrist o lavarout dezhi : « *Va C'halon a Zoue a zo ken tomm a garantez evit an dud, hag evidout dreist-holl, ha dre ma n'hall ket derc'hel enni hec'h-unan flammoù he c'harantez virvidik, e rank o skignañ drezoc'h hag en em ziskuliañ d'an dud evit o finvidikaat gant e deñzorioù prizius a ziskouezan dit.*»⁴ En un doare dreist-lavar e tispleg Kalon Sakr Jezuz e garantez evidomp. Ned eo ket un arouez ijinet, un arouez gwirion an hini eo, arouezius eo ar skeudenn eus ar skeudenn wirion da ziskouez ar c'hreizig-kreiz, ar stivell m'eo tarzhet diouti silvidigezh an holl dud.⁵

Santez Tereza ar Mabig Jezuz a gomprenas mat kement-se pa gemeras skeudenn ar galon da skeudenniñ karantez Doue a zoura Korf an Iliz. "*Komprenet em eus ez eus ur Galon gant an Iliz, hag emañ ar Galon-se o teviñ a garantez. Komprenet em eus ez eo ar garantez hepken a lak izili an Iliz da oberiañ, ha ma vije lazhet ar garantez, e paouezje an ebestel da embann an Aviel, ar verzherien a nac'hje skuilhañ o gwad... Komprenet em eus emañ er garantez an holl c'halvidigezhioù, ez eo ar garantez pep tra, e ren war an holl amzerioù hag an holl lec'hioù...; en ur ger, ez eo peurbadel !...*"⁶

Petra dalv neuze kensakriñ an eskopti da Galon Sakr Jezuz ?

N'eo ket ur jestr hud. Un oberiadenn speredel an hini eo, dezhi meur a vent :

- **Ur vent personel** a renevez kensakradur hor badeziant gant ar c'hoant da lakaat, pe da adlakaat, ar C'hrist e kreiz hor buhez, betek lavaret, evel sant Paol : « *Bevañ a ran, met n'eo ket me ken, ar C'hrist eo a vev ennon. Ar pezh a vevan hiziv er c'hig, a vevan dre ar feiz e Mab Doue, en deus va c'haret hag en deus en em roet d'ar marv evidon.* " (Gal 2, 20). Eus karantez ez eus anv amañ, eus an darempred personel hon eus gant an Aotrou. Un darempred gant ar C'hrist eo hag a zo mammenn a vuhez evit hon holl zarempredoù (koublad, familh, micher, ministrerezh, buhez relijiel, hag all), rak Jezuz a lavar e-unan : « *Hepdon n'hellit ober netra* » (Yn 15, 5), da lâret eo, chom a rafemp hep dougen ar frouezh a c'hortoz diganeomp !

- **Ur vent kumuniezhel hag a vision**, rak en ur gensakrañ un eskopti, ur barrez, ur gumuniezh, ur familh da Galon Jezuz, an dud fidel a zo pedet da vevañ muioc'h hervez an Aviel, da bediñ, da gemer perzh er sakramantoù, da skignañ ar feiz, ha da reiñ testeni eus ar garantez kristen. Ur vent misionel zo neuze evel m'en deus pouezet ar Pab Sant Yann-Baol II : « *Ret eo gwelet ar c'hensakradur da Galon ar C'hrist "e-keñver oberiantiz misionel an Iliz, rak respont a ra da vennad Kalon Jezuz ma vezo skignet dre ar bed-holl, dre izili he C'horf, emañ an oberiantiz-se penn-da-benn e servij ar Rouantelezh."* Dre-se, dre ar gristenien, "ar garantez en em skuilho e kalon an dud, evit ma vo savet Korf ar C'hrist, a zo an Iliz, hag e vo savet ivez ur gevredigezh a justis, a beoc'h hag a vreudeuriezh."⁷

4 S. Marguerite-Marie Alacoque, Emvuhezskrid, niv. 53 : Buhez hag Oberenn Marc'harid-Mari Alakok venniget, Pariz 1915, p. 69. Meneget e Dilexit, niv. 119.

5 Dilexit nos niv. 52.

6 Lizher santez Tereza ar Mabig-Jezuz da C'hoar Mari ar Galon-Sakr (8 a viz Gwengolo 1896).

7 Kemennadenn da-geñver kantved kensakradur gouenn an dud d'ar Galon Sakr, skrivet gant Leon XIII, Varsovia, 11 a viz Mezheven 1999 : Osservatore Romano, 12 a viz Mezheven 1999, p. 5.

• **Ur vent sokial**, rak en em ouestlañ da Galon Jezuz a dalvez kreskiñ hor c'harantez evit hon nesañ. Un istor hir en deus hon eskopti er c'heñver-se. Kalz gwazed ha maouezed, leaned, er skolioù, en ospitalioù hag en tiez-retred, hag ivez laiked e luskadoù an Obererezh Katolik hag en aozadurioù a garitez, o deus prederiet war ar frazenn Jezuz : « *Kement tra hoc'h eus graet evit unan eus ar re vihanañ eus va breudeur, hoc'h eus graet evidon* » (Mzh 25, 40), hag o deus klasket lakaat anezhi da dalvezout. Ar c'hensakradur-se a vroud ac'hanomp da greskiñ hor strivoù war an tu-se. Evel m'en deus disklêriet sant Charlez Foucauld : "*Karantez Kalon Jezuz evit an denelezh, ar garantez-se a ziskouez en e Basion, eo an hini a rankomp kaout evit an holl dud.*"⁸

• **Ur vent evit dic'haouiñ**. Ar Pab Frañsez a lavar splann : "*Gant ar C'hrist ez omp galvet da sevel ur sevenadurezh nevez a garantez war an dismantrou hon eus lezet er bed-mañ dre hor pec'hedoù. Setu an digoll a c'hortoz Kalon ar C'hrist diganeomp. E-kreiz ar gwalleur lezet gant an droug, Kalon ar C'hrist a fell dezhi kaout ezhomm eus hor c'henlabour evit adsevel ar pezh a zo mat hag ar pezh a zo kaer.*"⁹ Hag ar Pab a gomzas eus ar goulioù don a c'hellomp bezañ gouzañvet diwarno pe nezañ bet an oberourien anezho, er familh, er skol, er parrezioù, ha n'hallont bezañ pareet e gwirionez nemet gant sikour Kalon garantezus Jezuz : « An dic'haouerezh kristen n'hall ket bezañ komprenet evel un hollad oberennoù diavaez hepken, forzh pegen ret hag estlammus e vefent a-wechoù. Goulenn a ra ur gevrinelezh, un ene, ur ster a ro dezho nerzh, startijenn hag ijin dibaouez. Ezhomm he deus eus ar vuhez, eus an tan, hag eus ar sklerijenn a zeu diouzh Kalon an Aotrou Krist." ¹⁰

Perak kensakriñ bremañ hon eskopti ?

E-pad meur a vloaz hon eus labouret start en eskopti evit klask gouzout petra a c'hortoz diganeomp an Aotrou er prantad-mañ eus istor Iliz Penn-ar-Bed. An emgavioù, an emvodoù, labour ar skipailhoù-sturiañ. Ar *gwel* hon eus lakaet, ar *seizh hentenn* hag an *tri chanter* am eus embannet d'ar Pantekost, a zo doareoù eus ar bastorelezh a vez lakaet e pleustr abaoe meur a vloaz e parrezioù liesseurt. N'int ket nevez, met deuet int mat war wel evel pennaennoù evit hon Iliz-eskopti a-bezh, o kemer e kont hec'h istor hag he ferzhioù dibar. Reiñ a reont tro deomp da gerzhet asambles war ar memes tu evit bevañ penn-da-benn hor mision da embann an Aviel. Krediñ a ra deomp emañ ar Spered-Santel o kas ac'hanomp war an tu-se. Meur a barrez o deus kroget dija da labourat evit o lakaat e-barzh o raktresoù misioniñ pastorel.

An holl elfennoù hon eus evit mont war-raok gant emdroadur ar mision, a zo ken ret hiziv an deiz. Koulskoude, n'haller tizhout netra ma ne c'hoarvez ket war un dro gant ar reteradurioù-se un emdroadur personel ha kumuniezhel evit lakaat karantez Kalon Jezuz e-kreiz hon disentezioù pastorel. Evel ma lavar Jezuz deomp : "*Chomit ennon, ha me ennoc'h. Evel n'hell ket ar skourr dougen frouezh anezhañ e-unan, ma ne chom ket stag ouzh ar winienn, evel-se na c'hwi kennebeut ma ne chomit ket ennon.*" (Yn 15, 4)

Ar c'hensakradur-se eus an eskopti da Galon Sakr Jezuz a glask just-ha-just lakaat da dalvezout gwel hollek hor reteradurioù, a vez disklêriet gant ar galv-mañ : « *Degemeromp sklêrijenn hor Salver ha skignomp anezhi !* » Ar c'hensakradur-se a zo e gwirionez ur vroudadenn da respont da garantez Jezuz. « Leon XIII a zesk kement-se pa skriv, gant skeudenn ar Galon Sakr, e laka ac'hanomp karantez ar C'hrist da garet anezhañ en distro." ¹¹

Meneget e Dilexit, niv. 206.

8 Dilexit nos, niv. 179.

9 Dilexit nos, niv. 182.

10 Dilexit nos, niv. 184.

11 Dilexit nos, niv. 166.

Dre ar c'hensakradur-mañ d'e Galon Sakr, em eus fiziañs ivez e sikouro Jezuz ac'hanomp da vont dreist d'hon disrannoù diabarzh en Iliz, pe etre remziadoù, pe dre hon diforc'hioù a-fet kizidigezh, mennozhioù war ar bastorelezh hag al liderezh. Ur c'halvadenn da zistreiñ d'ar Galon evit tec'hout diouzh an ideologiezhioù. Ar Pab Frañsez a bedas ac'hanomp d'ober kement-se : « *Ned eo nemet adal ar galon e teui hor c'humuniezhioù a-benn da unaniñ o speredoù hag o youloù, ha da vezañ e peoc'h evit ma c'hall ar Spered hon heñchañ evel ur rouedad a vreudeur ; rak ober ar peoc'h a zo ivez labour ar galon. Ekstaz eo Kalon Jezuz, da lâret eo gour-sav ; deuet eo er-maez, ur prof eo, un emgav eo. Enni e teuomp da vezañ gouest da gaout darempredoù yac'h ha laouen an eil gant egile ha da sevel Rouantelezh ar garantez hag ar reizhded er bed-mañ. Hor c'halonoù unanet gant hini ar C'hrist zo gouest d'ober ar burzhud sokial-se.*»¹²

Setu ar pezh a c'hellomp esperout evit hon Iliz-eskopti.

Penaos e c'hellomp kemer perzh ?

Anat eo n'haller gouestlañ un eskopti da Galon Sakr Jezuz nemet ma klev pep hini ur galv da zegemer e garantez trugarezus ha ma ra e-unan pazennoù gwirion da respont d'e garantez. Evel ma skrive santez Marc'harid Mari : « *Resevet em eus digant va Doue grasoù dreist-goñvor eus e garantez, hag e savas c'hoant ennon da zistreiñ anezhi dezhañ un tamm bennak, da zistreiñ karantez evit karantez.*»¹³

Da gentañ, evel m'em eus lavaret a-us, ar c'hensakradur-mañ eus hon eskopti da Galon Sakr Jezuz a denn war-eeun da lakaat e pleustr ar reteradurioù eskoptiel am eus embannet d'ar Pantekost. E gwirionez, goulenn a reont a-berzh ar parrezioù, hag ivez a-berzh kement hini ac'hanomp, konversionoù, amdroadurioù, na c'heller bevañ nemet gant ur c'hoant don da respont d'ar garantez a ziskouez Jezuz-Krist deomp. Ar garantez-se eus Jezuz hag hor respont a vez bevet en holl reteradurioù :

- "*Degemer ha skoazellañ an dud en holl zegouezhioù ar vuhez*" a c'houlenn diganeomp cheñch hor selloù, chom hep barn, sellet ouzh ar re-all gant ar memes karantez a ziskouezas Jezuz d'an holl dud en em gave ganto, en o zouez publikaned ha pec'herien. Ur c'hras da c'houlenn ha da resev ez eo.
- "*Bevañ a-unan gant ar re baourañ*" a c'houlenn ivez m'en em lezimp da vezañ touchet gant karantez Jezuz, a ouie reiñ o flas d'ar re baourañ hag a roas deomp zoken an Evurustedoù evel un emzalc'h a zo da glask ha da vevañ (gw. Lk 6, 20).
- "*Diorren breudeuriezhoù kristen bihan*" zo un doare dreistordinal da vroudañ ha da skoazellañ ac'hanomp da zegemer karantez ar C'hrist dre ar bedenn voutin, prederiañ war Gomz Doue, hag an darempredoù etre breudeur. Ha da resev enno gred ar galon da vezañ testoù anezhi.
- « *Gervel pep hini d'ar servij* » a c'houlenn m'en em lezimp da vezañ fromet gant karantez Jezuz, a c'halv ac'hanomp da servijañ dre gemer amzer evit ar re all : « *Ar galon a laka pep darempred gwirion da vezañ posupl, rak un darempred ha n'eo ket savet gant ar galon ne c'hell ket mont dreist d'ar bruzunadur a zeu diwar an hiniennelouriezh*», eme ar pab Frañsez. ¹⁴

12 Dilexit nos, niv. 28

13 Dilexit nos, niv. 166

14 Dilexit nos, niv. 17

- “*Broudañ ar stummañ*”, rak diskouez a ra Jezuz e garantez deomp hag e ped ac'hanomp da respont d'e garantez dre zonaat ar pezh a ziskuilh deomp diwar-benn an Tad : « *Ho kalvet em eus va mignoned, rak kement am eus klevet digant va Zad am eus roet deoc'h da c'houzout.*» (Yn 15, 15)
- « *Akediñ war-dro al lidoù liturgek...* » rak an Aotrou a ziskouez deomp e garantez trugarezus er sakramantoù, hag e respontomp d'ar garantez-se ouzh o bevañ gant dinded ha gant feiz.
- “*(Ad)dizoleiñ pinvidigezh sevenadur ha yezh Breizh,*” rak Jezuz a ziskouez anat E Garantez e kreiz donañ hor sevenadur hag e hengounioù, dreist-holl ar "pardonioù" niverus, ha respont a reomp d'e garantez gant hor gred eus a-greiz hor c'halonoù, gant kaerder ar c'hantikoù hag ar prosesionoù.

Ma kensakromp hon eskopti da Galon Sakr Jezuz, ez eo evit ma ne vo ket bevannet hor reteradurioù da strivoù pastorel, forzh pegen reizh e vefent, met evit ma vezo degemeret ha doujet enno karantez Jezuz. Hag evit se eo ret deomp kreñvaat hon darempred gant Jezuz-Krist.

Petra 'zo d'ober dre just ?

Sant Paol a lavar deomp : « *Hoc'h aspediñ a ran eta, breudeur, en anv Trugarez Doue, d'en em ginnig hoc'h-unan da brofadenn vev, santel ha plijus da Zoue : sed ar sakrifis speredel a zle bezañ hoc'h hini.*» (Rom 12, 1)

Evit kemer perzh e kensakradur an eskopti e c'hall pep hini gouestlañ e vuhez e-unan da Galon Jezuz, da skouer gant ar formulenn-mañ kinniget e santual Paray-le-Monial, gant skoazell Kalon Divlam Mari :

Aotrou Jezuz, deuet oc'h da enaouiñ un tan war an douar, en em zilezel a ran hiziv da volontez an Tad e c'hwezhadenn ar Spered-Santel. Glanait va c'halon, entanit-hi gant karantez ha karitez. Lakait da greskiñ ennon ar c'hoant da vezañ santel. Dre erbedenn Kalon Divlam Mari, me,, en em ouestlan a-bezh d'Ho Kalon evit Ho karet hag Ho servijañ.

Amen !

Ar c'hensakradur-mañ a c'haller ober gant ur c'hantik pe gant ur bedenn all bennak ouzhpenn. Gallout a reer ivez bevañ anezhañ e-stern ar c'houblad, ar familh, ar barrez, en ur gempenn ar formulenn kinniget.

Un nevezadur en hor vuhez kristen a zeuio da heul ar c'hensakradur-mañ :

- Goulenn resev sakramant ar Gouzoumenn ma n'hon eus ket bet anezhañ c'hoazh.
- Kemer perzh en Oferenn ar Sul en un doare nevesaet, bezañ fealoc'h dezhi, ha bezañ emskiantekoc'h eus ar prof eus e vuhez a ra an Aotrou Krist deomp er sakramant-mañ.
- Mar bez posupl, kemer perzh ivez en Oferenn bep Gwener kentañ ar miz en enor d'ar Galon Sakr.
- Kemer perzh pe krouiñ ur vreudeuriezh kristen lec'hel vihan evit kreskiñ ar bedenn a-gevret ha pleustriñ ervat an Aviel.
- Kemer amzer da bediñ bemdez, ha mar bez posupl dirak ar Sakramant, meulet ra vezo, pe en ti dirak ur skeudenn eus Kalon Sakr Jezuz.

- Prederiañ bemdez war Aviel an deiz.
- Hag an holl zoareoù all da bediñ : Meuleudioù, ar Rozera, hag all.
- Hep ankounac'haat, a-dra-sur, an holl oberoù a drugarez a c'hallomp ober evit hon nesañ :
« *Dre gement-mañ hon eus anavezet ar garantez, dre m'en deus Jezuz roet E Vuhez evidomp. Ha ni a zle ivez reiñ hor buhez evit hor breudeur* » (1 Yann 3, 16)

Klozadur

N'eo ket ar c'hensakradur-se un ober arouzel tamm ebet ; klask a ra broudañ ul lañs a bedenn da greskiñ hor feiz, hon esperañs hag hor c'harantez, ha sikour deomp da lakaat da dalvezout ar *gwel* hag ar reteradurioù evit hon eskopti hon eus merket deomp hon-unan er bloavezh-mañ a jubile 2025. Fiziomp an argerzh speredel-mañ e Kalon Divlam ar Werc'hez Vari, rak hor c'has a ra da Galon Jezuz, ha goulennomp digant Tadoù ar Vro d'hor sikour gant o fedennoù.

Echuiñ a ran gant ar c'homzoù-mañ eus ar Pab Frañsez : « *Dirak Kalon ar C'hrist, me a c'houlenn ouzh an Aotrou kaout truez ur wech all evit an douar gloazet-mañ en doa dibabet ober ennañ e annez evel unan ac'hanomp. Ra skuilho teñzorioù E sklêrijenn hag E garantez, evit ma c'hello hor bed, a zreistbev e-kreiz ar brezelioù, an digempouezioù sokial hag armerzhel, ar bevezerezh hag implij dizenel an deknologiezh, adkavout ar pezh a zo ar pouezusañ ha retañ : ar galon.*»¹⁵

E Kemper, d'ar Merc'her 1añ a viz Here 2025,
da Ouel Santez Tereza ar Mabig Jezuz hag an Dremm Santel,
ha santez batromez ar Misionoù

✠ Laorañs Dognin
Eskob Kemper ha Leon

Eskopti Kemper ha Leon 3 straed Beltram a Rosmadeg 29018 Kemper Cedex

<https://www.diocese-quimper.fr/wp-content/uploads/2025/09/doc-lettre-pasto-octobre-2025.pdf>

15 Dilexit nos, niv. 31

TITOUROÙ OUZHPENN

Film "Sacré Coeur, sont règne n'aura pas de fin," gant Sabrina ha Steven Gunnell, eus kumuniezh an Emmanouel, skignet gant Saje. Ur c'hinnig kaer eus Kalon Jezuz eo, gant testenioù hag atersadennoù (chapaned Paray-le-Monial, Tad Potez, hag all). www.youtube.com/watch?v=4W

Kendalc'h d'ar Gwener 20 a viz C'hwevrer 2026 e skol-veur Loyola Pariz (pe enlinenn) "Ha talvoudus eo c'hoazh an devosion d'ar Galon Sakr ?" : www.loyolaparis.fr/agenda/la-devotion-au-sacre-coeur-est-elle-encore-dactualite/

Emgavioù en eskopti : deziadoù da zont war al lec'hienn www.diocese-quimper.fr

Levrioù : Pab Frañsez, Karet en deus ac'hanomp (Dilexit nos). Lizher meur diwar-benn karantez denel ha doueel kalon Jezuz-Krist, Montrouge, Bayard, 2024 Pedro Arrupe, Evel m'am eus ho karet. Meveriadurioù war galon Jezuz, Namur, Fidélité, 2004 •

Evit kanañ e brezhoneg :

O Kalon Sakr kalon Jezuz www.diocese-quimper.fr/kantikou/o-kalon-zakr-kalon-jezuz/

Jezuz a holl-viskoazh (Karantez ar Galon Sakr) www.diocese-quimper.fr/kantikou/jezuz-a-oll-viskoaz-karantez-ar-galon-zakr/

Evit donaat en ur vreudeuriezh vihan lec'hel :

- Peseurt doare eus an devosion da Galon Sakr Jezuz am eus dizoloet ?
- Peseurt frazenn el lizher pastorel-mañ he deus fromet ac'hanon dreist-holl (lavarenn viblek pe ur bomm bennak eus Lizher-meur Dilexit nos ar Pab Frañsez)?
- Peseurt jestr(où) gwirion a garantez evit Doue hag an nesañ a glaskin ober evit mont war-raok em buhez speredel ?

tr. vrezhonek gant Emglev an Tiegezhioù

DEUIT

DAVEDON

RAK DOUS ON

HAG IZEL A GALON

